

# FIZIANS!

149

Pa oa 'n heol o kuzat 'vel eur voul alaouret  
 A-dreon torgen Kador glazard ha morgousket,  
 Me 'oa e garridou tour parroz ar Fouilhez  
 A belec'h e welen betek lein ar menez.  
 Denved ha pennou-saoud a c'holoë 'n henchou  
 O tistrei deus peuri 'vit gounit o c'hraoiou.  
 Trouz ebet ne gleven, foet ebet ne strake ;  
 Ar vugale 'oa mud, nep kristen ne gane....  
 Evel-se, d'ar c'housper, gand eur spered mored  
 Va-unan 'n em gaven dirak Doue hag ar bed,  
 Pa zutas eur voualc'h dre he holl vouez nerzus :  
 « Fizians ! Ho pet fizians !! Ar Spi 'zo eur vertuz ! »

Ivonig PICARD.

*Er Fouilhez, Ebrel 1915.*

## Kimiaad soudarded yaouank ar bloaveziou pemzek ha c'houezek

« N'eus netra kaeroc'h er bed  
 eget mervel evit difenn ar Vro. »

PER, roue ar « Serbi ».

*Sant-Brieg, ar 25 a viz Kerzu 1914.*

War-raok, o bugale, o Breiziz kalonek,  
 Re ar bloavez pemzek hag ar bloavez c'houezek !  
 Eus ar menez Arre, eus ar menez Du,  
 Eus an enezen Vaz betek ouf ar Pouldu,  
 An holl a renk sevel evit difenn ar vro  
 'C'hoantaer da gemer, da wasta tro-war-dro.  
 Tenn e vo ar stourmad : Prusianed villiget  
 E pevar c'horn ar bed o devoa embannet :  
 « Ar Frans 'vo kabestret ha kaset da netra. »  
 Da c'hortoz e laeront broiou 'vit o saotra !  
 Ganto an ilizou 'vez dispennet, devet ;  
 An tiez diskaret, ar maeziou dismantret ;  
 Gwall-breizata a reont dre ma c'hellont bale,  
 Laza ar re c'hloazet, mac'hagna bugale,  
 Divouzella merc'hed pa ne reont ket gwasoc'h...  
 Paotred vad ar Frankiz, gouzanv seurt banden moc'h (1)  
 'Zo beza torfetour, dare d'ar wazoniez !  
 Mont a refet eta en hevelez breuriez ?

Ho, birviken !  
 Ho, birviken !!

Harz war ar Brusianed, enebourien d'an holl !  
 An nask war o fennou, war o goug ar wakol !  
 Paotred Breiz, war ho hent ra vo d'ec'h avel vad ;  
 Ra baro 'us d'ho penn daouarn Doue an Tad !  
 Krogit 'ta en alar ha ruilh d'ar c'hilhorou !  
 Troit, hadit irvi betek an talarou ;  
 Ar greun a ziwano eun deiz evit hor bro,  
 Evel er Bibl santel : re-all a zastumo.  
 'Kreiz ober ho tlead kalz a renko klenvel,  
 Diwaska poaniou kriz, beza gloazet, ... mervel !  
 Ar vuhez, piou n'her goar, 'zo leun a drubuilhou,  
 Karget eo a c'hlac'har, a wad hag a zaerou.  
 Met, pa vo deut an trec'h, e pep ti 'vo gweet  
 Kurunen d'hor broiz 'vo en dachen kouezet ;  
 A-zioc'h d'al leuriou-kêr, e-kreiz ar berejou  
 E vezo garanet, moulet o hanoiou.  
 Da dalvezout da skouer d'an holl remziou da zont  
 Ha da viret o sonj gant kalon hag hep spont

Da virviken !  
 Da virviken !!

IVONIG PICARD

## Kimiaad soudard va bro

*Da zoudarded Menez Arre e kinnigan  
 ar c'himiad-man.*

Troc'het e oa ar foenn, an eost a velene,  
 War ar gwez-avalou ar brankou a blege.

An holl a oa eürus. — « P'en em gavo ar goan,  
 A lare an dud koz. ni a harzo outan ! »

Ar baotred 'hunvree e kalz abadenou,  
 Nozveziou, marvailhou, marteze eurejou...

Koulskoude, an anken a rene war ar vro  
 Pa zeuas ar c'hleier da zon prim tro-war-dro.

Tra vantrus ! Tra skrijus, leun a dristidigez !  
 Petra 'weler neuze e meur a diegez ?

Priejou o sellet an eil ouz egile ;  
 Daerou 'n o daoulagad, 'lenvont d'o bugale.

— Kenavo, tad ha mamm, kerent ha mignoned,  
 Mestrez karantezus, ha va Breiz venniget !

Ho kuitat a renkan... Ar Frans a zo aze,  
 Gervel 'ra ac'hanon da vonet d'an arme.

Me a ray va dlead el linennou pella ;  
 N'eus ket nemet Doue am lakay da grenn !

Ma teufen da goueza, dalc'hit sonj ac'hanon,  
 Lavarit da zant Yann eur bater evidon.

'N eur goueza kredit mat 'vin trec'h d'an enebour,  
 Va fuzul em daouarn, sköet war va labour.

Fa bepred 'vo kanet e pep korn eus ar bed :  
 Eiskoaz c'hoaz eur Breizad n'en deus bet trahiset ! —

*Er Fouilhez, er c'henta a viz eost 1914.*

IVONIG PICARD.

(1) Respet d'ec'h.